

Au fol° 306 recto, seulement le titre :

Kloarec rosmad.

(306 recto)

Kloarek Rosmad.

(306 verso)

Me wel ma dousek er gamp ven
O tishuian he bleo melen.
Lem he lagad vel eur Stereden.

— Ada dach ma dousek Fransezjan
Ret e ho Kuitat c'hoas er bla man
Rag d'ar Studi da dregar a c'han.

— Mar ge d'ar Studi eo a c'het
Leket ober dime ma archet
Me na vin ket beo pa returnfet.

— Mar g'arri ganach a nep anui,
Ma dousek diesset eul lizer din
Me deuis soudan do gonsoli.

Warben eur c'hoec'h Sun goude se
Manet Fantik Klan en he gwele.

— Ma zad ha ma mam mar en c'heret
Leket Klask dime eur Belek.

(311 verso)⁽¹⁾

— Ma merc'h n'oc'h ket Ken goas skoet
Ma ve ret Klask d'ach hu eur Belek.

Ma Keret e heï eur messenger
Di gass eul lizer da Landreger
Da laret d'ar Kloarek dont d'ar ger.

(1). - Par suite de mauvais classement des folios avant la numérotation, le folio 311 verso doit être placé entre 306 verso et 307 verso.

— Klasket din eur Belek pi'ho pedan
Ne ket gant kloer iaouant e hon breman
Wit er wech diwezan a hon klan.

Klasket a voa dei eur Belek
ha pa wa nouët ha deveret
d'he zad ha d'he (1) mam e deus laret :

— Breman klasket din eur messajer
A iel hep dale da Landreger
De laret d'er kloarek dont d'er ger.

(307 verso)

— Nag ar Messajer a levere
En Ker Landreger pa arrie :

— Deboujour ha joa bars ar ger man ;
Pelec'h man ar golach aman,
Ma man kloarek Rosmad onnan ?

Kloarek Rosmad pa neus klevet
Ar messajer neus bet saludet
Ag el lizer neus bet ressetet.

Mes na wa ket al lizer lennet
Ma wa he galon glac'haret
Ma wa he daero o redek.

— Kloarek Rosmad a Choulene
Ti ar Rostang Koz pa n'arrie :

(308 verso)

— Yec'het ha joa d'an oll an ti man :
Ma dous Fransezeg pelec'h a man ?
Skruivet o cheus bet din a wa klan.

— A man duman on he goele
Tri denez zo, Otrio Doue !
Na deus ket roët sin a vuhe.

(1).— D'abord : e ; h (de : he) est écrit en surch. sur cet e : ~~he~~.

170

— Ehemet din eur tam golo
Ma welin ag hi a zo maro .

Boujour d'ac'h ma dousek Fransezeg
Bravan plac'h iaouank wa er vro man
Oh ! chenchet bras sur ho Kavan !

— Petra ve Koz na vent Ket chenchet
Tri de zo c'hon et a vuhe 'r bed,

Mert eur miracl a zo bet groet
Dre c'hrass ar Werc'hez em andret
Wit ma c'haljen c'hoas ho gwelet .

—
Pa ne ma dousek Koant d'ay douar
Me ie dre roudennek ar c'har
Mantret ma c'halon e c'hlac'har .

(309 verso)

Ar veleien a ie ey en gaman
Ja me ie warleñch n'ey welan .

—
Bars ar iliz pa hon arriet
War ar marchipi c'hon arzet

A me o lennan ma heurion
Ewit laret ma gousprou

Ewit ho laret na voant Ket
gant ma daero a want beuet .

Pa wa achu ay interramant
E wen galwet : — Kloarek iaouank
Deud da wit lod ar be'amant ?

— Me respontas n'en c'hervoudin
— Leket han da bidin e witi
me a rei ive pa hallin .

(310 verso)

171

Deus an iliz pa sortiz
 erwit retorn der ger war ma c'his
 eur plachek kaer bras a remerkis.

Eur plachek kaer quisket en gwen
 quisket en gwen ha dierc'hen,
 eur klec'h aour melen war he fen.

— Kloarek iaouank lar din breman
 Piou er bed man Kerez muan?

— Gwech all pa vev Fransez
 hi wa hini a gerent ar muan
 Na garan den ennan breman.

Na garan Ken nemert Doue,
 Nemert ar Sent ag an Elle,
 Doue d'am c'hassou prest da vete.

7

[pas de trad. franç.]